



DALC'HOMP D'HOR FEIZ

§ Diskan.




Da feiz hon ta - dou koz, Ni pô-tred Breiz I-




zel, Ni zal-c'ho-mad a - to, Vit feiz hon ta - dou



koz Hag en dro d'he ban - ni - el, Ni oll en em star - do, Feiz




ka - ret hon ta - dou, Mor - se ni ho - na - cho, Ken-




toch ni a var - vo, Ken-toch ni a var - vo, Ken-toch ni a var-


Reunblad.



vo. — D'ar c'hrou - a - dur bi - han e ki - chen-nig e



ga - vel E la - kit eur vam vad, en deiz e - vel en noz, Er



boan hag en an - ken, hou - man bu - an ra eurzell, Var



ar gro - az san - tel, e zont er ba - ra - doz. — Da...

DALC'HOMP D'HOR FEIZ

VAR DON : *Sainte Religion*

*Da feiz hon tadou koz, ni potred Breiz-Izel,
Ni zalc'ho mad ato ;
'Vit feiz hon tadou koz, hag en dro d'he baniel
Ni oll en em stardo.
Feiz karet hon tadou, morse ni ho nac'ho
Kentoc'h ni a varvo (ter).*

D'ar c'hrouadur bihan, e kichennig e gavel,
E lakit eur vam vad, en deiz evel en noz ;
Er boan hag en anken, houman buan ra eur zell
Var ar groaz santel... e zonz er baradoz.

D'ar potr, d'ar plac'h yaouank, c'hui-ziskouez hent ar furnez,
C'hui lavar en heuilla eb krena dirag den ;
Bezit, tud yaouank Breiz, bezit epad ho puez
Ato gwir gristenien ha morse treitourien.

D'an den koz, gwen e benn, e korn an tan azezet
O skuill daelou a geuz var e amzer genta ;
Varlerc'h kals a boan, c'hui, Salver ar bed,
Er baradoz e vo eürusted evitha.

D'an den divar ar meas hag ive d'an den a vor
C'hui a ro nerz-kalon er poanioù stourm outho ;
Gouzout 'reont en env, e kavint oll dor zigor
Ar vuez vo bet tenn ; dan drubuil kenavo.

